

388.

Clouarec a Noyal.

(205, suite)

Pa oan ebars ar prison Naonet,
 Den ebet na zeue d'am guelel,
 Nemet al logod hac ar razet.

Nemet al logod ha razet du,
 Demeus ar re-se me var didu.

Pe me de em prison e Guenet,
 Tud avoalc'h a zeue d'am guelel.

Tud jentilet ha demezelet,
 Ha tud a lezen var o ronset.

Ha diganen-me e c'houlennet:
 Clouarec a Noyal, petra p'ius grêt?

(206)

Me ne meus na tanet, na laeret,
 Na var ar hentehou bras dirobet.

Mes, hervez so bet din lavaret,
 Merc'h ar senechal a so levet.

Mar emeus-me bet grêt kementse,
 Meus e c'havet kousket em guelel.

Meus-hi kavet etre diou lincol wrenn,
 Ar karkaniou aour var e c'herc'hen.

Lezit-hi ganen, va mab Clouarec,
 Ha me rei d'ec'h poez ar aour poezet.

Na pa goustfe din-me va oll mad,

389

Me lako da vale da vrazon-chalat.

(207)

Va mab kloarek, lejit-he gane,
Me roi dec'h ar poez va inkane,
Va mabig ha me var e rore.

Kloarek a Noyal a lavare,
Var ar g'enta parzen a bigne:

Pelec'h emâ merc'h ar senechal,
Pa na mae erruet n'ar fragal,
O daou, tri rum dantet var e zal?

Kloarek a Noyal a lavare,
Divar an eil parzen, pa bigne.

Digassit-hu din-me va binioù,
Na m'ar rin ur zonnenmad pe diou.

(208)

Me lako lies er c'halonou,
Spicial re so en hor c'hampaou.

Mere'h ar senechal, dal m'e glêvas,
Contren eus e quele a rogas
Ober parzennou da zont d'an ias.

« Heur-vad d'ec'h-hu, va sadik agren,
C'houi a zo arze var ho torchen,
Da gass kloarek m'ammour d'ar gorden.

Diskennit, kloarek, ha deut d'an ias,
Bet on-me bet dit hac e rin c'hoas.

(ve-me?)

Ha ve visko brons ha boutou koad;
Danvez avoulc'h so en ty va zad.

Erit lakat tud da labourat,
Ha dalc'h mere'h senechal en e stat.

fin.

Communiqué par M. Th. De la Villemarqué,
juillet 1836.

(Vol. IV, p. 205-208.)
22 str. numérotées.